


Deomp 'barzh ar c'hoad



Albom : **Balafent** (UBAPAR)

Pozioù : Maëlle LE FLOC'H

Sonerezh : Thomas LE SAULNIER, Kerfi TROUGUER

Kanet gant : Elsa CORRE, Katell CHANTREAU, Annaig JOANNIC,

Awena LE BARON - COURTET, Maëlle LE FLOC'H

1. Deomp deomp deomp 'barzh ar c'hoad

Deomp da gaout plijadur

Chom a rin didrouz ha fur

Loened 'welin me zo sur

Ha krediñ a rez, ha krediñ a rez ?

Fur e chomin ha loened 'welin

O ya !

2. Deomp deomp deomp 'barzh ar c'hoad

Deomp da grapat er gwez

Krapat 'rin 'barzh ar gwez pin

Marteze 'welin ur gegin

Ha krediñ a rez, ha krediñ a rez ?

Krapat a rin, ur gegin 'welin

O ya !

3. Deomp deomp deomp 'barzh ar c'hoad

Deomp da sevel lochoù

Sevel 'rin ul loch raden

Marteze 'welin ur gauenn

Ha krediñ a rez, ha krediñ a rez ?

Ul loch 'savin, ur gauenn 'welin

O ya !

4. Deomp deomp deomp 'barzh ar c'hoad

Deomp buan da c'hoari

C'hoari 'rin 'kichen ar stêr

Marteze 'klevin trouz un naer

Ha krediñ a rez, ha krediñ a rez ?

D'ar stêr ez in, un naer 'glevin

O ya !

5. Deomp deomp deomp 'barzh ar c'hoad

Deomp buan da redek

Redek 'rin pep lec'h e Breizh

Marteze 'klevin mouezh ur bleiz

Ha krediñ a rez, ha krediñ a rez ?

E Breizh 'redin, ur bleiz 'glevin

O ya !

